

Au fol° 132 recto, seulement le titre :

2 recto)

Ar Gonnar.

[rien aux fol^{os} 132 verso et 133 recto.]

1 verso)

Ar Gonnar.

Annaik Chaudour a levere,
De zad ha de mam eun de a ve :

— Ma zad ha ma mam, mar em c'heret,
Miret ne ve groet an eured.

~~Eur gwel gëlo a meus Klevet,
Gant eur c'hi Klan e hebet Kroget. (1)~~

— Penos miret ve groet an eured
An dud warben arc'hoas zo pedet?

Lest den deodou an dud da brezek,
Rag eun den fur e c'he ho fried.

— Ma breur Belek, mar em c'heret,
Miret na ve groet ma c'heured :

Eun den fur e c'he ma fried,
Kousgoude deus han meus me morc'het.

3/4 verso)

— Ma c'hoarek Koant dime leret
Petra ennan zo dac'h displijet?

— En en dremen Skalier ar veret
Eur gwel Sel ouin en deus bet groet.

(1). — Strophe ainsi barrée, non traduite au folio 134 recto.

76

Me meus marc'het, ma breur Belek,
ha ve gant droug ar c'hi Klannvet.

— Pa wa lakat, herve ar c'his,
An dud iaouank en ho divis,

Pa voc'ant deus an dol ho Koaniam,
E Klefont Anait a voelan.

— Debomp, evomp, greomp cher vad
Lezomp an dud iaouank en ho Stad.

Anait Chaudour a levere,
Ar gampet wen er momet se :

— 'Itron Varia an Drindet
Sent hag elle ma Sikouret.

(135 verso)

Possub e've aman a varfen
hag e ma breur Belek en c'hichen!

— He breur Belek vel me neus klevet
Dreist an dol a zo dilampet :

— Diorret din, diorret an hor,
Diorret an hor pe me he gor.

Ma wa ket he c'hir perlavaret
An hor warne neus divarc'het.

— Ma c'hoarek Annan Sav ta da ben
Ma rin me dide da Kroas nouen

Ma rin dide da Kroas dirwean
Drog ma c'hi dirvar er bed man.

— Ô pens e Savfen me ma fen
Pa man ma chalou war ma barlen,

(136 verso)

Ma bleo dre ar gamp a Kuchadou
ha ma goad enni a boulladou.

— Da bara c'heureuzer te ma c'hoar,
Pe ne gwir was klan gant ar gonnar?

— An nao mis a wa tremenet,
Me jonje ganen na glanvjen Ket.

An nao mis a wa tremenet,
Mes an nao loariad na wan[te] Ket.

Pa meus lac'het ma muan Karet
Ewit en ampech na voant Ket.

Te da unan tē'h a lesse,
Me sent ma bar o tont adare.

(137 verso)

— A pa vez klan gant kant gonnar,
Me renko kat revench ma c'hoar.

— Pa meus lac'het ma muan Karet
Ewit en ampech na voant Ket.

Pa meus lac'het ma muan Karet,
Groet tu dime vel ma Kerfet,

Ma mouget en tre diou c'holc'het
Pe losket ma oll goad da redek.

]

[trad. franç. de ce texte,
par Penguern,
aux fol^{os} 134-137 rectos.]